

DEZREVELLOÙ AN DUD KENFINET RÉCITS DE CONFINÉS

Petra am eus da lavarout diwar-benn ar bac'hadur?

A-benn ar fin, hervez ar pezh hon eus klevet d'ar Meurzh tremenet, e vo echu a-benn nebeut amzer pe dost ha gwel-a-se! Met ma 'z'on onest, n'on ket gwall eürus... N'on ket ma-unan penn en ma zi, o vevañ gant Jakez! N'on ket enoet ha pa n'eus ket sport ken, na laz-kanañ, na kentelioù brezhoneg e Brest, na emgavioù gant ma familh...

Mont a ran d'ober ma frenadennoù gant ma marc'h-houarn evit ober sport, lenn a ran muioc'h (ul levr e brezhoneg, ul levr e galleg a-bep-eil), gwriat a ran ivez da aozañ profoù Nedeleg evit ma bugale-vihan.

Liorzhañ a ran pa vez brav an amzer goude lein : amzer eo da zivarrañ ar bodadoù ha bez ez eus kalz deuzouto ! Un deg karrad-stlej bras bennak hon eus kaset d'al lastezerezh dija ...

Ha daoust d'ar c'hraouia, e ran war-dro daou vab-bihan er gêr d'ar Yaou ha war bevar bugel-bihan er Releg d'al Lun en abardaevezh... gant ma faper-aotre evel-just !

Tremen a ran un amzer hir a-walc'h o komz gant tud ma familh pe ma mignoned a-drugarez d'am fellgomz.

Setu perak n'em eus ket da glemm met dinec'het e vin pa vo echu ar c'hudennoù niverus liammet d'ar c'hovid daonet-se !!!



Nicole